

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs round

Ar mezhvier

Pa gomañs ar mezhvier diblasañ,
Bec'h dezhañ chom en e sav,
Digouda digoudenig ye ye ye, Digouda digoudenig trañ la.

Pa gomañs ar mezhvier borodiñ,
Neuze e sav cheuleuvari.

'N ur zont d'ar gêr 'lamm er poullou,
An dour a ya en e votoù.

Ne respet na pri na bouilhenn,
Tout e ya eno penn-da-benn.

An teroueriz p'o deus gwelet,
A deu 'n o dorioù da sellet.

Ma lavarent en ur c'hoarzhin,
Erru d'ar gear sac'h ar gwin.

Ma lavarent 'n ur dreñ o fenn,
Erru d'ar gear ar gailhenn.

E wreg a c'houlenn digantañ,
'sambles gant piv out bet oc'h evañ ?

Hag eñ respont en ur ger berr,
An dra-se n'eo ket oc'h afer.

Gant kamaraded tro-war-dro,
Ha boutailhad ni hor bezo.

E wreg a grog en ur penn-bazh,
Komañs o-daou da c'hoari 'vazh.

Ar vugale a yoa bihan,
'vit gwelet bazhadoù ne reont van.

Ar c'hazh a ouie an doare,
Yeas da guzhat dindan ar gwele.

Mes* ar c'hi paour ne ouie ket, [* Met]
Hag a yoa bet gwall "atrapet".

Setu va son oc'h echuiñ,
Kanit un all me ho "supli".